



An dra gwelus

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv ?

Adalek ar cp en ur c'hlas pe get

Talvoudegezh ar c'hoari

mestroniañ an egor,

Pal ar c'hoari

_lec'hiañ e brezhoneg goude bezañ desket, a-zehou a-gleiz, etre, e-kichen, dirak, a-dreñv, war, dindan, a-us, en nec'h (e krec'h), en traoñ hag all..., hag ivez gerioù an arrebeuri pe traoù all a c'hell servij evit lec'hiañ eveljust.

Mont en-dro ar c'hoari

ar pal eo lec'hiañ un dra zo bet lakaet war wel en ul lec'h anavezet gant ar vugale, hep dilec'hiañ traoù all.. Pad ar mare e vez kuzhet an draig eo ret d'ar c'hoarierien serriñ an daoulagad. An hini en deus kavet an draig ha graet ur frazenn reizh a verk ur poent.

Doareoù all da c'hoari

1) dre argaserezh (en ur dennañ kuit)

Tro an dachenn c'hoari vez graet ur wech gant ar c'hoarierien. Ar re n'o deus ket gwelet an draig a azez en-dro. Ar re o deus gwelet a zeu da lavarout e pleg-skouarn rener ar c'hoari pelec'h emañ, hag e vez adkroget gant ar c'hoari, en ur zilec'hiañ an draig, ha nemet gant ar re o doa kavet hag e-keit ha ma ne chomo nemet ur c'hoarier.

2) Dre skipailh :

Ingalet e daou skipailh e vez ar c'hoarierien. E-pad ma vez kuzhet an ibil e ya ur c'hoarier eus pep skipailh er maez. An hini kentañ a gav a laka e skipailh da verkañ ur poent.

3) Ar vunudenn gemmet :

Kemmet e vez munudenn gwiskamant ur c'hoarier
Ret eo kavout ar c'hoarier hag ar vunudenn.

Evezhiadenn

Da welout en-araok dre ar c'hoari vo graet :

- anv ar pezhioù-arrebeuri
- ar gerioù lec'hiañ
- anv ar pezhioù dilhad
- anvioù e-barzh an ti

Frazennoù da implijout :

- serrit an daoulagad , digorit an daoulagad, klaskit, savit, azezit, ...
- e-kichen ul levr emañ an draig ? - ya, e-kichen emañ
 - n'emañ ket
- dirak ar prenestr emañ an draig ?
- petra `zo bet kemmet ? (pe cheñchet)
- roched Morgan `zo bet kemmet ? - ya, ar roched eo
 - n'eo ket